

E koun an “Tremener“ : An Aotrou abad Lec’hvien (Plêraneg 1872 – Landreger 1899)

GWERZIOU ha SONIOU dibabet gand e vignoned diwar e baperou

Bet embannet e 1900. Modernnaet eo bet an doare skriva.

Notenn gand Embann an Hirwaz : Diskouez a ra ar pezh a zoñje ar Gatoliked e fin an XIX^{ved} kantved.

Taolenn

Kentskrid Dir-na-dorr.

Kentskrid Abherve.

Gab LISKILDRY

WAR MARO AN AOTROU LEC’HVIEN

Taldir

MARONAD AR BARZ YAOUANK LEC’HVIEN

*

Barzonegou Lec’hvien

EN RIBL AR STER

AR BUGEL HAG AR MARO

HUÑVRE

AR FALHER

AR MESAER

HUANADOU EUR ZOUDARD

MOUEZIOU AR VERED

TI AR PAOUR

AR STER

KIMIAD AR MOUSIG BIHAN

AR HAVELL GOULLO

GWREG AR MEZVIER

AL LIZERIOU DEVET

AR POK DIWEZAÑ

PERAG ?

AN DIOU VOUEZ

KROAZ ar STURIER

DISTRO ar MOUSIG BIHAN

O SOÑJAL EN NEÑVOU

AN DERO TRIST

BEVET BREIZ-IZEL

DA ZERR-NOZ.

Kent-skrid Dir-na-dorr

An Aotrou 'n abad Lec'hvien, mestr-kelenner en kloerdi Landreger, a oa euz Pleraneg. En eul leh anvet Kermestr, damdost da Bempoull, emañ e di ; eno e vev e dad hag e vamm, en-dro deze kalz a vugale. Ne oa ket re ; mez ar Mestr en-deus e zoñj e-unan. An aotrou Lec'hvien a oe savet en karantez Doue hag e Vro, en-dro dezañ, euz a-berz e dud, nemed komzou ha skweriou mad : e di a zo bet a-viskoaz skwer an tiegeziou kristen ; dre ze e krogas abred ennañ ar c'hoant da labourad 'vic mad e Vro. Bepred e vije o soñjal petra 'oa ar gwellañ d'ober evid hadsevel on Breiz hag he divenn a-eneb pep fall. « War ar feiz nerzuz, emezañ,, evel eur rohell, eo red dim hadgwriziennañ on yez hag on hiziou koz. » Ar wirionez a oa gantañ, hag ar gomz-se a vo da bep hini ahanom eur reolenn. Ganet e oa Barz ha den a labour war eun dro. Bezañ en-devoa eur spered lemm, eur galon domm, nerzuz ha leal ; war al lodenn en-doa dibabet en-deus labouret bepred heb flach tamm, karantezuz e-keñver ar re a gerze a-du gantañ, dispont e-keñver ar re all.

Me, pa hen anavezis, a welas ennañ eur gwir Vreizad, sioul ha didrouz, 'vel eun den a zoug en e galon soñjezonou uhel.

Greet e-nije kalz evid mad ar Vro, mar 'nije lezet Doue anezañ ganim ; mez me 'gred penaoz euz ar bed all, e-mesk ar Vretoned koz ouz ar re¹ 'oa ken heñvel, e sikouro bepred ahanom : beleg ha Breton, e vo 'kichenn Doue gwellañ kannad ar Vretoned yaouank.

¹ ar re : pere, er skrid orin.

Kent-skrid ABHERVE

Evid skriva diwar-benn on mignon « An Tremener », em-eus lezet ma fluenn gand “Dir-na-Dorr“ a anaveze mad anezañ. Evidon-me, n’am-eus bet an enor d’hen gweled nemed eur wech, en diskenn hent-houarn Sant-Brieg. Ne ouien ket neuze e vije bet ar genta emlewadenn-ze an hini diwezañ ivez. An « Tremener », en e zon war ar falher, en-devoa diskouezet dim pegen prim ha pegen garo e sko an Ankou, falher an Aotrou Doue. Eñ e-unan a zo bet eur skwer euz ar gwall-daoliou-ze. Daou da vo gand e ene !

En Cymru emañ ar hiz, pa varv eur barz, da zével eul levr gand e oberou. Oberou an « Tremener » a zo deuz an dibab ; moullañ aneze on-deus greet eta, hag e kinnigom aneze d’on lennerien en koun euz an hini e-neus greet hag en-devoa c’hoant d’ober kemend a vad d’ar Vro ha d’he Yez.

Gab LISKILDRY (?)

WAR MARO AN AOTROU LEC'HVIEN

Hekleo Kersac'h, savet ho mouez,
Dre ar hoajo' ;
Ar braz 'kleojoh ken aliez
A zo maro !

Tourel-Mac'ho, war ar grehenn,
'Uz da Borz-Don,
Ne hleofet mui e delenn,
Sklintin o son !

Ken prim ma tarz ar luhedenn,
En oabl teñval,
Ken prim eet kuit ar sklêrijenn,
Ha noz du-dall !

An *Tremener* goude bezañ,
Siwaz, neubet²
Kanet dim sonig ar flourrañ
A zo tavet.

'Vel an alhweder o sevel,
War-du 'n heol splann.
A zo tizet gand ar sparfell,
E-kreiz ma kan !

O ! avel, perag diskar gwe'
Freuz leiz o beh,
Pe zo gwez all n'o-deus oute
Nemed koad seh ?

Draog, perag eo sonn 'vel an derv,
D benn dibred,
Pan eo diskaret 'barz an erv
An tmouez ed ?

O ! maro kriz, te 'sko taoliou
Pounner meurbed !
Mar zo kalon pe skiantchou,
'Zellez kammed.

Ha siwaz, netra 'dalvez dim
Klask stourm ouizt :
Da falh garo 'vezo ouzim
Bepred gonid !

² neubet : ? . Marteze 'n-eus bet.

Doue 'felle eur barz dezañ,
'Kichenn e dron ;
Dibabet en-deus ar gwellañ,
Setu ennon³ !!

³ Setu ennon : ?

Taldir

MARONAD AR BARZ YAOUANK LEC'HVIEN

Me 'glev ar hloh-kañv o seni glaz,
Re aliez e tint, siwaz !

Deuz tu ar huz-heol, an taoliou
A zeu stank war an aveliou.

Da bete Raon deut ar helo' :
Kloh an Ankou, piou 'zo maro ?

.

« Eur Barz, a groz ar hloh en êr,
A zo maro en Landreger.

Eur Barz yaouank, izel-galon,
Doue da vo gand an Anaon ! »

Kloh ar hañv a dint glaharuz,
E vouez 'zo yen ha truezuz.

'Vel pa ouelfe en e wisk arm...
Mez n'ema ket e-eun o harm.

Breiz-Izel 'deus gouelet ive'
D'ar vleuenn trohet ken beure,

D'ar Barz yaouank a zeblante
Dond brudet-braz en Breiz eun de',

Youl Doue 'zo don ; n'hallom ket
Gouzoud petra 'zo 'n e uoueled.

Evelkent, gwad Barz eo,
War ar maro-ze 'kresk ar beo.

Gwad ar Varzed a zo kouezet
'Zo bet had ar re da zoned.

Kousk, o ! *Tremener* helavar,
Kousk en peuh 'n ez kwele douar.

Da lesano 'oa gwir, Lec'hvien,
Rag n'ah-eus greet nemed *tremen*.

Marteze, 'n eur dibab hennez,
Da blanedenn haro 'welez.

Mez da vin az-teus degaset
War Di Breiz, 'zo kazi savet.

Dihoant ha faëuz euz ar brud
'Vel an eostik-noz en e glud,

Da vouez a oa kalz lirezinnoh,
Hag, en eur ger, 'kanez gwelloh.

Sent Breiz, en o Faradoz kaer,
'Degemro da ene sklêr,

Keid ma kousko 'n e arched koad
Da gorv divlamm ; *Tremener* mad.

Barzonegou Lec'hvien
EN RIBL AR STER

Ponner e oa ma zreid, ha ma hein daoubleget ;
Ar hezenn a ruille war ma zal poulltrenet,
Ha skuiz e oan o vond ma-unan dre an hent
Goloet ha meineg dre beleh e kerzen.

Goude bezañ kerzet pell braz ha gand anken,
Damdost d'ar huz-heol, 'n em gavis 'n eun draonienn
Leun a freskadurez 'leh e ruille eur ster,
Gorreg ha dudiu, a-dreuz d'ar prajeier.

'Vid diskuiza eun tamm e ris eun azezig
En ribl ar ster, 'n eul leh gwasket. Eul lapousig
A gane 'uz d'am fenn e ganaouenn lirzin,
'N eur veska e vouezig gand trouzig eur vilin.

Den ebed war an hent, den ebed er parko',
'Vel pa vije dre oll tremenet ar maro ;
Er pellou, koulskoude, 'kleved c'hoaz o vlejal
Ar zaout, ha chas tagnouz war o lerh oh harzal.

A-benn eur pennadig, eun den a dremenas,
Toued a ree Doue 'vel eun diloster chas ;
Skrijal a ree 'eneb d'an Neñv ha d'an douar
Ha skei 'ree didruez ar marh 'oa e garr.

'N eur weled an dra-ze, glaharet ma halon,
E soñjis kement-mañ : Ar ster 'h a d'ar mor don,
Al lapousig a gan meulodi da Zoue
'Kichenn an neiz am-eus kuzet e-mesk ar gwe' ;

An heol, e-pad an deiz, a sklêrijenn ar bed,
Ha, pa'h arru an noz, al loar hag ar stered
A deu da lugerni en bolz hlaz an Neñvou,
Ken skeduz ha ken splann evel êledigou.

An oll dreou krouet, 'n eur ger, 'ra an dever
'o bet gourhemennet deze gand o Hrouër.
An den hepken, an den, eur hrouadur dispar,
Dibabet gand Doue evid ren an douar,

'Deu da zevel e vouez 'eneb an Doue-ze,
Ha da lakaad e nerz, e spered, e vuhe',
D'ober brezel Dezañ en eur stumm ken euzuz
Ken a denn war ar bed ar gwalleuriou spontuz.

Doue, Rener pep tra, pa'z oh oll-halloudeg,
Greet ma vezo an den 'n e zervij kaloneg,

Roit nerz d'e volantez, d'e spered sklêijenn,
Evid ma'h ay d'an Neñv d'o meuli da viken.

29 a viz Mae 1898.

AR BUGEL HAG AR MARO

An heol a skuill war an douar
E sklêrijenn vadelezuz ;
Kas 'ra kuit anken ha glahar,
Ha renti 'ra an oll joaüz.

Er halonou e lak buhez,
Mez, evid distruj e labour,
Me 'wel an Ankou didruez
'Lemma e falh dibalamour.

En ribl ar ster, eur bugelig
A red, a hoari hag a gan ;
Tridal a ra e galonig :
Ne oar ket zo⁴ er bed-mañ poan.

Diwall, ma bugel, o ! diwall !
Na dostaez ket re d'an dour ;
Me 'wel aze, 'n eur horn teñval,
A-dost dit, skeudenn eun treitour...

Mez ar bugelig, dibreder,
A red hep soñjal doug ebed...
E draod a ruz, ha 'barz ar ster,
Ar paotrig kêz a zo kouezet.

Kenavo bremañ, tad ha mamm !
Kenavo kerent, mignoned !
Kenavo c'hoariou divlamm,
Ha c'hwi, bokedou alaouret !

Klevet e oe eur skrijadenn
O sevel, euz 'uz d'an dour :
Mouez ar bugel kêz o houlenn,
En an' Doue : Sikour ! Sikour !

Sikour ebed ne erruas,
Hag ar bugelig gwalleuruz
Buan d'an don a ziskennas,
Na pebez maro truezuz !

Evel-se ivez, aliez,
Arru gand an den er bed-mañ :
'Wechou, 'n eur glask al levenez,
E kav ar maro ar c'hwerva.

Miz Even 1898.

⁴ zo : tregerieg, ez eus.

HUÑVRE

Eun dispah braz 'oa bet e Breiz-Izel on Bro :
Tud fall, mouget gante ar feiz en o halono',
O-devoa fellet deze ober on henvroiz
Stourm 'eneb da Zoue hag eneb d'e Iliz⁵ ;
Hag en o Breiz, siwaz ! truez eo hen lared,
Kalz d'ar varmouzien-ze a oa bet 'n em werzet.

En amzer-ze, amzer a oa meurbed spontuz,
-Soñjal ennañ hirie a zo din gwall-boaniuz !
Ne veze klevet ken, en kêr hag er mêziou,
Nemed tud digristen o sevel o moueziou
Da gana soniou lik, ha da lakaad da ren
Eur fals kredenn bennag e-barz kalon an den.

Giziou on zadou-koz hag o yez venniget
Gand an dispaherien a oa bet distrujet :
Skrivagnerien, gwerzet o fluenn da dud gall,
A skrive evite levriou displeal
Livet enne gevier 'eneb d'on zent koz,
Rag war ar zent, dreist-oll, e taolent o malloz.

Chomet 'oa, koulskoude ; c'hoaz eun denig bennag
Ouz ar giziou, ar yez, ar zent ha Doue stag,
Hag a laboure stard evid harz da goueza
Ar pezh a vad a oa lezet c'hoaz en e za :
Mez se a oa nebeud 'mesk ar fall o tiroll,
Ha Breiz-Izel, siwaz ! a rankas mond da goll.

*

Breiziz, ma breudeur ger, mar 'peus c'hoant da vired
Na deufe an huñvre am-eus deoh displeget
Da vezañ gwir eun deiz, hebdale marteze,
Savet oll en ho sav da stourm evid Doue,
Ho kustumou, ho yez, hag oll zent koz ho Pro ;
Anez se, em-eus aon, on Breiz 'ya d'ar maro.

Miz Gouere 1898.

⁵ Stourm 'eneb da Zoue hag eneb d'e Iliz : **notenn gand Embann an Hirwaz** : Se 'oa bet skrivet gand eur beleg. Felloud a ree d'ar veleien, en amzer-ze, beza mistri war an dud.

AR FALHER

An heol a strink skeduz a-dreist d'ar menezioù,
Hag a ra lugerni ar gliz war ar brankou
Er hoajou er klever richan al laboused,
Dudiuz, 'dreuz d'ar gwez gand an avel douget.

En tour an iliz koant ar hleier 'zav o mouez
Da zegas soñj d'an oll deuz an anaon kêz
Galvet d'ober o feoh gand an Aorou Doue,
Hag a lar d'ar re veo pedi stard evite.

Eun den e-kreiz e oad, skañv ha seder, a ya
E-unan gand an hent, gand eur falh war e skoa',
Hag en eun dorn dezañ eur voutallad jistr mad.
A-benn emberr d'an noz 'vo falhet foenn ar prad.

Diwisket e borpant, troñset e vilgino',
E rochedenn dibrenn, e askre dizolo,
Lemmet gantañ e falh, e krog gand e labour,
Dindan an heol skeduz a lak an treo' flour.

Ar yeot glaz war e lerh a gouez founnuz-founnuz,
Hag o weled aneze, 'kreiz al labour poaniuz
A ra d'eur hwezenn stank redeg diouz e dal,
E galon gand ar joa 'n em laka da dridal.

« 'Vid ar bloaz, emezañ, pa deuio ar goañv kri'
Ma loened en o hraou 'devo foenn da zebri ;
Ma hezeg, a dra zur, a deuio tomm o gwad,
Ha ma zaout, gwellaet, a roio din lêz mad.

Ha mar plij da Zoue, 'zo braz e vadelez,
Skuill e vennoz warnon ha war ma ziegez,
Me a vo paeet mad deuz ar boan 'm-eus hirie,
Ha 'kichenn eun tantad me 'ziskuizo neuze. »

O soñjal kement-se e kav e nerz kresket ;
E falh e-mesk ar yeot a red buan bepred,
Ha, daoust d'ar hwezenn 'zo deuz e dal o redeg,
Ankouaad 'ra e boan, mui-ouz-mui kaloneg.

Eur wech an amzer e chom eur pennadig,
Ha mond a ra laouen d'evañ eur bannahig
Deuz ar voutaill kuzet du-hont en troad ar hleu',
Rag an heol a zo tomm, hag ar zehed a deu.

... Setu an abardaez : Achu eo an devez,
Ar falher 'ya d'ar gêr ha gantañ levenez ;
Skuiz eo, ha war an hent e dreid a gouez pounner,

Mez e galon bepred 'zo evruz ha seder.

Gweled a ra e di, du-hont 'barz an draonienn,
Ha deuz ar siminal e sav eur vogedenn ;
Bremaig, gand e wreg ha gand e vugale
E tebro soubenn vad, ouz an daol 'n e goaze'.

Bezañ zo eur falher ha na ve skuiz kammed,
Falhad a ra an dud dre bevar horn ar bed,
Ha, heb bezañ lemmet, e falh 'vez lemm dalhmad.
Hebdale, marteze e teuio d'on falhad.

Miz Gouere 1898.

AR MESAER

Nan on 'med eur bugel bihan,
Eur paour-kêz mesaer deñved ;
Nebeud a dra 'anavezan,
Ha n'am-eus ket gwell a spered.

Ne oufen displega sklêr
Nag ar *fizik* nag ar *chimi* ;
Ar chifou⁶ 'gomprenan ket kaer,
Nag ivez an *astromoni*⁷.

Bremañ, hervez 'klevan lared,
Er skoliou d'ar vugale oll
An traou-ze a vez displeget.
N'o gouzon ket... Din pebez koll !

Ma zad ha ma mamm a oa paour,
Ha 'daleg an oad a zeg vla,
Pa n'am-oa nag arhant nag aour,
'M-eus ranket gonid ma bara.

Dre ze, er skol n'on ket bet pell :
Goud 'ran a-veh lenn ha skrivañ,
Niveri eun tamm, waz pe well...
N'eo ket a-walh se 'vid bevañ ?

Pa oan o heuill ar hatekiz,
Ma ferson a lavare :
« Evidoh 'vo eun dra iskiz
Mar n'anavezet ket Doue... »

Hag abaoe, war ar menezioù,
Er hoajou hag an hentchou braz,
El lanneier hag er prajou,
Ha, dreist-oll, en bolz an neñv glaz.

Em-eus klasket Doue dalhmad,
'Vid gwelloc'h hen anavezoud :
Dre oll 'm-eus gwelet e lagad,
Dre ol 'm-eus gwelet e halloud.

Setu nze ma deskamant :
ANVEOUD DOUE DA GENTAÑ !
Kalz a lavar on diskiant :
Pe int pe me eo ar furrañ ?

⁶ chifou : an niverou.

⁷ chifou : astronomie, e galleg.

E miz Eost 1898.

HUANADOU EUR ZOUDARD

Me 'oar eun ti toet en glaz,
Dirag eur hoad kisin ha fao :
Deuz ar gambr 'weler ar mor braz,
Touriou, kestell, hg ilizo'.

Eno 'm-eus bet evurusted
E-kichenn ma mamm ha ma zad,
Ma breudeur ha ma hoarezed,
Ha bremañ em-eus kalonad.

Ma Breiz-Izel em-eus kuiteet
'Benn zo tri bloaz pe war-dro ;
Da gostez Pariz eh on eet
Da zerviji ar Frañs, ma bro.

Abaoe, evel an dour a ruill
Em-eus baleet war dre-oll,
Hag em-eus bet kalz a drubuill
O vevañ e-mesk tud diroll.

Gwechall, d'ar zul ha d'ar goueliou,
'H een da gleved an overenn :
Hag aliez ar gousperou
A heuillen ivez penn-da-benn.

Amañ, d'ar zul 'vel d'ar pemde'
E vez red-mad labourad stard,
Heb galloud soñjal en ene...
Hag-eñ 'n-eus ene eur zoudard ?

« N'en-deus ket, hervez 'lavare din
Eun devez eur mestr digristen ;
En despet da ze, me 'gav kri'
Bevañ 'vel eun den hep kredenn.

Pegoulz 'ta 'teuio an amzer
Ma hellin, pell deuz an dud fall,
Daoulinañ dirag an aoter
'N em iliz-parrouz 'velgwechall ?

Pegoulz e hellin-me komz c'hoaz,
Heb aon ebed, ar brezoneg,
Yez ar zent koz hag a varvas
Evid o feiz, ken kaloneg ?

Pegoulz 'hellin-me, gand ma zad,
El lanneier hg er parkoo,
'N emlakaad c'hoaz da labourad,

Seder dindna bolz an Neñvou ?

Serviji ar Vro, me hen goar,
D'eun den yaouank 'zo enoruz :
An hini 'labouran douar
D'e vro ivez 'zo talvouduz.

E miz Gwengolo 1898.

MOUEZIOU AR VERED

Tro-mare arhuz-heol e oan em gad⁸, eun de',
Gl aharet ma halon o pedi war eur be' :
Ar glaz-noz a zone klemmuz, e lein an tour,
Klemmuz 'vel mouez eun den poaniet o houl sikour.

Eun nebeudig amzer goude an anjeluz,
'Seblantas din kleved eur vouezig dudiuz
O sevel tamm-ha-tamm e-kreiz ar sioulder,
Eur vouez flour 've hini eur bugel c'hoz tener.

« Ma Doue, a lere, me ho trugareka
D'am bezañ kemeret 'barz ma oad tenerra :
Ma vijen bet chomet 'mesk fallentez ar bed,
Marteze 'vid biken me 'vije 'n emgollet.

Leh o meuli bremañ en lein ar baradoz,
En ivern islonkuz, o krial mil malloz
'Eneb deoh hag 'eneb d'ho lealded dispar,
Me 'vije da viken mantret gand ar glahar.

Ma zad ha ma mamm gêz, dizehet ho taerou,
Ha lezet c'hoaz ar joa da dond 'n ho kalonou,
Rag me 'zo lakaet evuruz gand Doue ;
Heb bezañ gouzañvet trubuillou ar vuhe'.

Me 'zo evel beuzet en eur mor a zudi,
Gand ar zent, an êlez hag ar Werhez Vari :
Pedi 'ran evidoh ha ma fedenn, avad,
Gand an aotrou Doue 'vez selaouet dalhmad.

Ar homzou-ze 'ree din ankouaad ma glahar,
Ha sevel ma spered uhel'uz d'an douar...
Pa davas ar bugel ; kenkent, en eur horn all,
E klevis eur vouez skiltr gand kounnar o krial :

« Malloz d'ar bed, malloz d'e hiziou milliget ;
Malloz d'an dañsou lik, ijin an droug-spered !
Malloz d'ar re o-deus stlabezet war ar vro
Kanaouenn hudur, da goll an eneou⁹ !

Malloz d'ar vezventi 'deu da diskar an den,
Hag a lak anezañ ken izel hag eul loen.
En eur ober dezañ koll e damm skiant vad,
Ha gwerza e ene evid eur chopinad.

⁸ gad : gavet

⁹ da goll an eneou notenn gand Embann an Hirwaz : mennoziou ar veleien, a felle dezo beza mistri war an dud.

Malloz d'an tadou kriz, d'ar mammou didrue'
Nan int ket aketuz da rei d'o bugale
Kelennadurez vad, deskadurez gwirion,
'Vid lakaad ar furnez da greski 'n o halon.

Malloz din ma-unan, pa'h on bet gê a-walh
Da heuill c'hoantadegeziou ma halon ken diwalh :
'Vid eun tamm plijadur tremenet ken buan,
Me a vo da viken o leski 'barz an tan... »

Dre ma komze hemañ, ar vouez muioh euzuz
'Zeblante, 'kreiz an noz, ober hekleo spontuz.
Pa oe tavet, raktal eur vouez all a zavas,
Mouez raouiet eun den koz, ha 'vel-henn e komzas :

« Tremen war an douar evel al loened mud
Hep soñjal en Doue, mestr ha rener an dud,
'N eur heuill c'hoantegeziou ar galon hag ar hig,
Hag-eñ 'h eo bezañ den ? Ya ! eur pa gan mik¹⁰ .

Poaniuz eo, a dra zur, stourm ouz an techou fall ;
Mez an aotrou Doue a deuio d'ho tiwall
Mar laket ho fiziañs Ennañ, heb aon 'bed,
Ha 'barz an Neñv Gantañ e vefet kurunet.

An den 'barz ar bed-mañ ne ra nemed tremen,
Hag an hirra buhez 'zo 'vel eur vogedenn
A weler o sevel sonn-mad war-zu an neñv
Hag a vez diannaad eur pennadig goude !

Gê eta eo ar re a vev war an douar
'Vel pa ne dlefe ket ar maro o diskar,
Ha na zoñjont kammed nmed klask levenez,
'Vel pa na vijent ket leun a zempladurez... »

Tra-walh em-oa klevet ha dond a ris en-dro,
'N eur ober eur bedenn evid ar re varo :
D'ar re 'zo tremenet, roet ho Paradoz,
Ma Doue, ha warnom skuillet stank ho pennoz.

2 a viz Gwengolo 1898.

¹⁰ eur pa gan mik : ? (moulet evel-se e-barz al leor orin).

TI AR PAOUR

En korn teñval eur hoad distro,
E leh ne deu den diwar-dro,
Eul lochenn vihan 'zo savet,
An disterra 'oufer kaved.
Dirag, nan-eus ket a vali ;
Eur wenojennig a gas di ;
Ha pa ver daou en eur geñver,
Kerzed dre eno ne heller.

An nor a zo izel ha bihan,
Hag ar stern anezi a zo moan.
Nemed eur prenestr nan-neus ken,
Ha c'hoaz eo torret e werenn ?
Diabarz 'zo nebeud a dra :
Eun daol da lakaad ar bara,
Eur pres da lakaad an dillad,
Hag eur gwele kaled 'vel koad.

Ouz eur voger liv al ludu
'Zo tachet eur hrusifi du ;
A bep tu dezañ skeudenno',
Bet staget eno pell a zo :
Setu aze an oll annez
An-eus ar paour 'n e diegez.
Gand se, hag-eñ 'h e' evuruz ?
« O ya, mar n'e' ket aviuz ! »

Mar geo toet e di gand plouz,
Da vihanna n'eus ket a drouz
En-dro dezañ, neb leh ebed,
Nemed richan al laboused,
Mouez dister al lommig avel
O voudal 'mesk ar gwez uhel,
Hag hiboud dudiuz an dour
O redeg e-mesk ar yeot flour.

'Vid bezañ evruz er bed-mañ,
N'eo red ebed d'an den bezañ
O ruillal war arhant nag aour :
Aliez an hini 'zo paour
A binvidegeziou ar bed,
'N-eus muioh a evurusted
Evid an hini 'zo pinvig,
Mar goar reiza e galonig.

Paour-kêz, 'barz da lochenn dister,
Mar mirez da galon zeder,
Da ene glan ha didamall,

Ha da spered pell euz ar fall,
Te a gavo war an douar
Evel eun tañva deuz ar gloar
A zo miret e-barz an Neñv
Da oll zervijerien Doue.

Mar geo dister da diegez,
Me 'wel 'uz d'az penn eur palez
Savet evidout en Neñvou :
Eno, 'mesk an êledigou,
Ar zent oll hag ar sentezed,
Ar verzerien, ar gwerhezded,
Ne vanko dit biken netra,
Ha te 'gano e-leh gouela.

E miz Du 1898.

AR STER

Beajour, azez ‘n ez koaze’ ;
Mammenn ar ster a zo aze,
E-kichenn ar menez uhel,
‘Mesk ar vein, e troad ar rohell.

Buan-buan e strink an dour,
‘N eur hiboudal gand eur vouez flour,
Flour evel kan al laboused
E-mesk deliou ar gwez kuzet.

Sell outi, du-hont er prajou,
O redeg ‘mesk ar bokejou.
Hag hi ken plên evel eul lenn,
Pa vez kouezet an avel a-grenn.

Sklêr eo evel an arhant glan,
Ha, ‘pad an deiz, an heol splann,
Ar yeot glaz, hag ar gwezigou
A wel enni o skeudennou.

Pa gouez an noz war an douar,
Ar stered skeduz hag al loar,
Evel e-barz eur melezour
En em zell laouen ‘barz an dour.

*

Treuzet ganti ar prajeier,
Eh arri ar ster en eur gêr ;
Raktal, setu-hi strafuillet,
Ha kollet ganti he sklêrded.

Kemnt tra o-deus kêriz,
Heb mez ebed, o ! tra iskiz !
Er ster ‘vez taolet prim gante :
N’he sellet ken, fanket eh e’.

Mond a ra bepred gand he hent,
Sioul ha gorreg ‘vel diagent.
Mez, me ho ped, stouvet ho fri,
Ha c’hwez gwell-fall a zo ganti.

Deut eo da vezañ ken teñval
Ken eh eo an dour-teil hañval :
An heol, al loar hag ar stered
Enni¹¹ ne vezont ket gwelet.
Evel ma tosta d’ar mor braz

¹¹ Enni : er ster.

D'he heul e rank strafuilla c'hoaz
Aliez meur a gorv maro
Evid kuzañ an torfejo'.

*

Abaoe em-eus anaoudegez,
Er bed-mañ a distridigez,
Em-eus gwelet meur a ene
A zo hañval ouz ar ster-ze.

Keit ha ma oant c'hoaz yaouank-flamm,
An eneou-ze 'oa divlamm,
Glan evel an erh o kouezañ
War ar mêziou, e-kerz ar goañv.

An eneou-ze, meurbed kaer,
A oa gwir skeudenn o Hrouer,
Ha skedi 'reent, e gwirionez,
Evel an heol en e greiz-deiz.

Êledigou ar Baradoz
Ne badent mui ouz o gortoz,
Hag o gervel 'reent 'n o hichenn,
Da veuli Doue da viken.

Siwaz ! dre ma'h int deut en oad,
'H int pellaet dimeuz arvad,
Hag o heuill skweriou fall ar bed
Eh int bet mastaret abred.

Int hag a oa, gwechall, gwenn-kann,
Ha skeduz 'vel an heol splann,
A zo bremañ du ha hudur
Evel eun tammig breinadur.

Skeudenn ar Hrouer, en eun taol,
Enne zo bet diverket oll,
Ha deuz uhelder an Neñvou
N'o galv ken an êledigou.

KIMIAD AR MOUSIG BIHAN

Kenavo, mamm, kenavo, tad,
Hirie e rankan ho kuitaad ;
Deuteo devez an disparti.
Chom ganeoh, siwaz, n'hallan mui !

Kenavo, ma breurig Frañsez !
Nag a wech, gand levez,ez,
On-eus c'hoariet war an aod,
Hag er prajou 'mesk ar yeot !

Kenavo, ma hoar Janedig,
Karantezuz, 'vel eur goulmig ;
N'hellfom pelloh 'barz ar chapel
Pedi on-daou a vouez uhel.

Da vihannañ, pa vin du-hont,
E-kreiz ar mor braz divergont,
Me 'vo kennerzet o soñjal
E pedi 'vidon 'vel gwechall.

Kenavo,ma zi bihan koz,
Ouz ar wall-amzer serret kloz ;
Ennout 'h deut war an douar :
Da guitaad a ran gand glahar !

Kenavo, ma bagig kempenn,
Ken koantig gand da oueliou gwenn ;
N'az pagein ken er poullou-dour
'Vel gwechalll, pa oan dilabour.

Nag a blijadur em-eus bet
Ouz da weled ken herr kaset
Gand an disterrañ lomm avel !
Kenavo, paour-kêz c'hoariell !

Kenavo, iliz ma farrouz,
Ken kaer evel eru baradou¹² :
Ennout 'm-eus ebt ar vadiziant,
Ha goude, meur a zakramant.

Kenavo deoh, den a iliz,
'N-eus desket din ar hatekiz :
Soñj em-eus deuz ho kenteliou ;
Heuill mad a rin hoh aliou.

Kenavo deoh ivez, Breur ker,
Spered lemm ha kalon zeder,

¹² baradou : baradoz (evid ar rim).

C'hwi hag an-neus desket din-me,
Gand kalz a boan, an A B C.

Kenavo deoh, bugale 'r skol ;
C'hwi a zo ma mignoned oll ;
Pa vo an avel o krozal,
Pedet evid ar mousig fall.

Pep hini, war an douar-mañ
'N-eus e blanedenn da heullañ ;
Ma hini 'zo redeg ar mor,
Ar bez braz-se bepred digor.

E miz Genver 1899.

AR HAVELL GOULLO

En bolz an Neñv, an heol a sked,
Hag a zedera krenn ar bed ;
Er yeot, er bokejou, er gwez,
Emañ o tridal ar vuhez.

An evned, pignet war ar skourr,
A richan o hanaouenn flour,
Ha klevet 'vez en êr skiltruz,
Evel eur muzik didiuz.

Pegen brao e' bevañ hirie !
Nag eh e' laouen an ene !
Dleed a rafe ar Maro
Lezel eun tamm e falh garo.

Mez, siwaz ! he lemma a ra :
Sell hañ du-hont !... Peleh eh a ?...
Serret oll ho prenestr ha dor,
'Vid na gavo neb leh digor.

*

Eneb ar Maro hag e falh
Ne vo kammed stourmet a-walh :
Na prenestr na dor zerret kloz
Ne ra souza ar Falher koz.

E-kichenn eru havell goullo,
Eur vamm yaouank a skuill daero' :
Ha mabig bihan 'oa ennañ
'Zo bet tennet deuz ar bed-mañ.

An Ankou, kounnaret spontuz,
Hep selaou klemmou ankeniuz
Ar vammig paour ken glaharet,
Gand krizder braz 'n-eus eñ falhet.

Hag an heol a dalh da barañ
Hag an evned da richanañ,
An treo' en douar da greski,
Hag ar vamm gêr da hirvoudi.

*

Mamm ankeniet, na ouelet ket :
Ar bugelig ho-peus kollet
A zo savet war-eeun d'an Neñv,
Hag a zo evruz gand Doue.

E-mesk êlez ar Baradoz
Emañ bremañ ouz ho kortoz :
Nan eus trubuill ebed,
'N-eus 'vitañ 'med evurusted.

Pa diskenneh 'barz ar bez don,
Ar horv-se ken ker d'ho kalon,
Ar hleier 'zone 'barz an tour
Gand o moueziou ar muiañ flour.

Hag an Iliz santel, on mamm,
'Leh gouela d'ar bugel divlamm,
'Gane dre henou ar beleg
Psalmou seder ha karanteg.

Na ouelet ket eta pelloh ;
Soñjet er hontrol 'h e' gwelloh
Mervel pa vez an ene glan,
Ar spered hag ar galon splann.

'Wechou, dre ma sav er vuhe'
Ar bugel 'vastar e ene :
D'e dad, d'e vamm 'h e' eun drubuill,
Hag ober 'ra deze gouelañ puill.

Hoh hini-c'hwi, kempenn ha koant
'N-eus miret sae e vadiziant ;
Ganti eh e' da nijal d'an Neñvou,
C'hoarzet 'ta, 'leh skuilla daerou.

E miz C'hwevrer 1890.

Notenn gand Embann an Hirwaz : Iskiz-kenañ eo ar barzoneg-se. Mennoziou beleien an amzer-ze.

GWREG AR MEZVIER

« O ! mamm ger, lere din peleh emañ ma zad,
Pa n'arri ket er gêr ha bezañ noz da vad ?
Aon 'm-eus o kleved an avel o krozal
Hag ar hurunou o yudal. »

Mantret gand ar glahar, he halon vruzunet,
Ar vamm gêz a hirvoud, 'n he hluch war an oaled,
Ha ne respont netra d'he bugelig yaouank ;
War he dioujod daerou 'red stank.

Bloaveziou he buhez, evel eur ster deñval
A skrabin gand he dour eur bagad loened fall,
'Dremen gand kalz a herr dirag he daoulagad,
Hag a ra dezi gouelañ da vad.

O ! nag eh e', siwaz ! troet he flanedenn !
Nag emañ pell bremañ he yaouankiz laouen !
Pell ivez ti he zad, 'leh ma oa evuruz,
Gwechall plahig fur ha sentuz.

Peleh emañ bremañ an hini 'lere dezi :
« 'Vid da lakaad evruz me 'boanio heb distrei,
Mar kerez ganin-me unani da vuhe',
Hervez lezenn zantel Doue... »

Ar vouez hag ar homzou a oa ken dous, ken flour !
Piou nan-ije soñjet e vijent bet treitour ?
Mez an oanig tener 'zo troet 'n eur bleiz kri' :
Euz an-eus ouz pep hini.

O ! nag eh e' bet berr joa joa he friedelez !
E-pad eur bloaz pe daou, karantez, levenez,
Plijadur a bep tu, unvaniez wirion...
Abaoe daerou gwalh he halon.

Greet he-deus, koulskoude, he dever penn-da-benn,
Dalhet he-deus he zi reizet mad ha kempenn ;
Nan eus tra louz, zoken er horn ar muiañ du,
Nemed en oaled, al ludu.

Staget he-deus evel en ti he zad gwechall,
Skeudenn ar hrusifi war dremm ar chiminal,
Hag, a bep tu dezañ, Sant Jozeb, ar Werhez,
Skweriou dispar a zantelez.

Evid ober pab mad d'an hini a gare,
D'ar pried dibabet ganti dirag Doue,
N'he-deus espernet mann, na labour nag anken,

Na pedennou, na pinijenn.

Da betra eh eo dezi kement-se talvezet !
Siwaz, an hini 'zo d'an evaj re dechet !
Ne chom ket pell ennañ ar garantez wirion
Kaled 'vel roh en e galon.

E gorv a zo devet gand tan ar gwin-ardant,
'N e ene saotret sae hlan e vadiziant :
Kouezet eh eo pell a zo ken izel hag eul loen
Nan eo tamm hañval ouz eun den.

O ! Mezhvier kaledet o ! Mezhvier milliget !
Soñj eun tammig 'n ez kwreg gand an enkreiz muntret ;
Soñj 'n ez pulaligou gand an naon o krial !
Lar din hag-eñ out didamall.

E miz C'hwevrer 1890.

AL LIZERIOU DEVET

O ! al lizeriou koz
Dastumet en arh kloz
E. M. L.¹³

Eur zul goude ar gousperou,
Dilabour krenn ha skuiz-marro,
Deuz ma hambr serret ouz ar goañv,
E sellen ar glao o kouezañ.

Ma spered 'oa meurbed ponner,
Ha ne ouien petra ober,
Pa deuas, en eun taol, 'n em fenn,
'N em lakaad eur pennad da lenn.

Me da gemer lizeriou koz
Dastumet en eun arhig kloz,
Ha da lenn aneze gand aked
Evel pa 'm-oa o resevet.

Meur a devez deuz ma buhe'
Dirakon 'dremenas neuze :
Deiziou a joa, deiziou a boan,
Deiziou a glemm, deiziou a gan.

Nag e oa laouen d'am halon
Hadlenn lizeriou eur mignon,
Eur breur, eur hoar, eun tad, eur vamm !
-Siwaz ! Eet eh int oll en flamm !

O lakaet 'm-eus e-barz an tan :
Devet int bet oll a-unan :
Ha gand ar maged dioute
'Zo eet deg vloaz deuz ma buhe'.

Ne pebez torfetour on bet !
Ma halon baour am-eus mantret.
Piou 'ta 'n-eus dallet ahanon,
Penn-botez, genaoueg ma'z on !...

Unan deuz al lizeriou-ze,
Karantezuz ha leun a fe',
A oa skrivet din gand ma zad,
Hag a lare 'vel-henn, ken mad :

« En Neñv emañ da dad kentañ
Nemed derhel e blas ne ran,
Ha ken evid sentiñ ouzin

¹³ E. M. L. : ?

‘H e’ gleet out Outañ sentiñ... »

Eul lizer all, skianteg braz,
-Ma gwellañ mignon hen skrivas
Pell deuz on Breiz o veaji –
‘Lere ‘vel-henn gand melkoni

« Abaoe pevar pe bemp bloaz ‘zo
Em-eus baleet meur a vro :
Biskoaz hini n’am-eus gwelet
Ken braz ‘vel Bro ar Vretoned.

Biskoaz, m’hel lar a vouez uhel,
Da Zoue, d’e Iliz santel,
Na zo bet hini ken feal,
Na ken doujet gand an dud fall.

Dizehañ ‘rin, heb dale pell,
Mar nan¹⁴ ar prim da Vreiz-Izel :
Ar wennili ‘zistro d’he neiz ;
Me a ranko distrei da Vreiz... »

‘N eur lizer all e lennen c’hoaz :
« Me a vo beleget arhoaz ;
Evid ma vo prest ma halon,
Eur bedennig vad evidon... »

Doue, ma herent hag ar Vro
‘Dremene dre ma lizerio’...
Ha setu ‘o luduet !
Nag evidon pebez torfed !

‘Maint c’hoaz dirag ma daoulagad,
Gand ar flamm o troidellad :
Tad ha mamm, breur ha c’hoar, mignon,
Me a houll diganeoh pardon !

E miz Meurz 1899.

¹⁴ nan : ne roan (?)

AR POK DIWEZAÑ

Astennet e' aze war eur gwele a boan,
Brevet gand an anken, drouglivet, dialan,
Hag eur hwezenn yen-skorn pizennet war e dal ;
'Raog pell amzer amañ e vo eet d'ar bed all.
Kerent ha mignoned, bodet en-dro dezañ,
Mantret gand ar glahar, a zo krog da ouelañ ;
Hag eñ, e zaoulagad stag ouz ar hrusifi,
E galon bruzunet gand beh a velkoni,
A dro krenn e spered war deiziou e vuhe',
Falhet 'vel bokejou gand eur barrad arne.

'N em weled 'ra bugel, seder ha leun a nerz,
Ha plên dindan e dreid an hent e-leh ma kerz :
Sevel a ra diboan ha dizoursi er bed ;
E dal 'zo digoumoul, n'an-eus trubuill ebed :
Evid gonid dezañ magadurez, dillad,
Hag ober rei dezañ kelennadurez vad,
E dad a labour stard 'baoe beure bete noz,
A-wechou, koulskoude, avel ar bed a groz,
A yud hag a hourdrouz, garo, a-uz d'e benn ;
Neuze, eun dorn a grog 'n e dorn 'vid hen divenn :
Dorn e vamm e' hennez : an dorn-ze 'zo nerzuz.
Mad da ren pep hini dre an hentchou riskluz ;
Rag oll nerz ar galon 'zo dastumet ennañ,
Ha ken kreñv ha kalon eur vamm nan eus netra :
Chom 'ra 'ta sonn 'n e zav daoust d'an arne diroll.
Heb brahitellad tamm, tra souezuz d'an oll,
Den yaouank kaloneg, e benn gand e zever,
Heb chuchual nepred, heb kammed koll amzer.
Souden, eun deiz a zav, lugernuz 'n e vuhe' ;
'N em unani a ra, hervez lezenn Doue,
Gand eur plahig yaouan, leun a furnez dispar,
Ha ker splann heh ene evel an heol pa bar.
Evid lakaad anezi evuruz penn-da-benn,
'Baoe beure bete noz, bemdez e labour tenn :
O ziegez a zo evel 'vel eun oabl digoumoul,
Evel eun draonienn fresk pe eru blênenn sioul
E leh kammed ne groz an avel dirollet.
Netra na den ne harz ouz o evurusted.
Doue a deu zoken, evid hen kenderhel,
Da venniga aneze, 'n eur reiñ deze eur bugel.
Na pegen evuruz e oant o-daou neuze !
An heol madelezuz, pa sked e lein an Neñv,
A greñva ar vuhez er yeot, er bokejou,
Ha laouenna pep tra dre oll, dre ar mêziou,
A laka da ganañ an evned war o brank ;
'Vel-se ha muioh c'hoaz ar bugelig yaouank,
Pa deu war an douar disi krenn ha dinamm,

‘Ro laouenidigez ha d’e dad ha d’e vamm.

Mez, siwaz ! er bed-mañ, pep tra herr a dremen :
Eun nozvez reo ‘zo ‘walh da vritañ¹⁵ eur blantenn,
Hag a-wechou, evid diskar ar hreñvañ den.
E-kreiz e nerz, ne fell ‘med eur hleñved hepken.
Meur a wech, da greisteiz, pa lugern taer an heol.
Koumoul teñv¹⁶ ha ponner ‘vez gwelet a-greiz-oll
O sevel hag o harz sklêrijenn ha tommder
Da gouezañ war ar bed ha d’hen lakaad seder.
‘Vel-se ivez, allaz ! ‘barz an tiegezou
Leh ma oa evuruz ha sart ar halonou,
An drougeur a ‘n em led evel eur vantell ru’,
Da vougañ sklêrijenn ar joa deuz a bep tu.
Penaoz eh e’ souden diskennet en ti-mañ
An drougeur, ha trubuill hag hirvoudou gantañ ?

En taol-gwad ‘n-eus skoet an den kreñv ha yaouank :
Er gambr, en-dro dezañ, ar hlemmou a zav stank.
Hag eñ, taolet gantañ eur zell war e vuhe’,
Ha goullet gand glahar pardon digand Doue.
« Me ‘garfe, emezañ, me ‘garfe ‘raog mervel,
Briata ma mabig, poked c’hoaz d’am bugel !...

Ar bugel ‘oa kaset da hoari d’eun ti all,
Mez ar vamm d’hen kerhad a deredas raktal.
« Ma êlig koant, emezi, a-raog mond da gousked,
Deus da boked d’az tad ‘vel ma’z out kustumet !... »
Hag eñ war-lerh e vamm, laouen braz, da redeg.
« Ma zad, setu ar pok ar muiañ karanteg.
Bremañ, ni ‘gousko stard.. Keno arhoaz, ma zad ! »
Hag an tad a respont, daerou ‘n e zaoulagad :
« Kenavo, ma bugel, kenavo en neñvo’ !... »
Eun hanter-eur goude, an tad a oa maro !

26 a viz Meurz 1890.

Da zul ar bleuniou, da 10 eur noz.

¹⁵ da vritañ : ?

¹⁶ teñv : teo.

PERAG ?

Perag an den war an douar
'N-eus eur blanedenn ken digar
Ma'h eo mantret gand ar glahar ?

Pa laosk ar bokejou c'hwez vad :
Pa gan al laboused er hoad.
Perag an den 'n-eus kalonad ?

Perag 'vez koumoulet on zal
Ken aliez, ha ken hañval
Ouz an oabl er goañv teñval ?

Perag eh om-ni gwallgaset
Gand an naon pe gand ar sehed ;
Perag e' ken gwak on yhed ?

'Vel eun delienn gand an avel,
Perag on halon a vrañskell
War hent ar vad, bete mervel ?

Perag war spered kant-ha-kant
E vez kement a nehamant
Ken n'hellont kammed bezañ drant ?

Perag on joaiou a dremen
Ken herr evel eul luhedenn,
Hag a lez war o lerh anken ?

Perag, 'barz ar bed-mañ an dud
'Zo entreze mui a dabut
Evid entre al loened mud ?

Perag evid galloud bevañ,
An den ken stard a rank poaniañ
Noz-deiz, 'wechou, heb diwkuizañ ?

Perag, e-barz ar parkeier,
Dindan ar skorn pe an tommder
E poagn ken tenn al labourer ?

Perag, evel eun emzivad
O weled da ge¹⁷ bro e dad,
An den 'zo daerou 'n e lagad ?

Perag an avel hag ar glao,
An dour, an tan, ar huruno'
A ra kement a walleurio' ?

¹⁷ da ge : ?

Perag ar grouadurien oll
A zeblant ober brezel foll
D'an den evid hen kas da goll ?

-Hag eur vouez kreñv, hini Doue,
'Respont deuz uhelder an Neñv :
« Ar pehed 'zo kirieg da ze ! »

5 Mae 1890.

AN DIOU VOUEZ

Diou vouez em-eus klevet o sevel 'uz d'ar bed,
O-diou skiltruz da vad, mez dishañval meurbed ;
Ha diou vandennad tud em-eus gwelet ive' :
Bandennad an diaoul ha bandennad Doue.

Unan deuz ar moueziou a skrije evel-henn :
« E-barz ar vuhez-mañ, mar ne heuill ket e benn,
Mar ne vez ket sentuz ouz mouez flour e galon,
An den ne gavo ket eur blijadur wirion ;
Mar lak e volantez da blegañ da eun all,
'Nevo ket a frankiz muioh 'vid ar chatal.
Pa 'mañ hirie an deiz, dem eta, kaloneg,
Da hoari las en kêr, hag heb bezañ mezeg !
Kad a refom, moarvad, trutellou war on hent !
Hag a laro dim : « Kollet 'deus o skiant ! »
Mez n'o selaoufom ket, hag e talhfom da vond...
Klevet mad, trutellou, ni 'zo kreñv ha dispont ;
N'anavezom mestr ebed, na Doue, na diaoul ;
Dre hent an ebat 'fell dim ruillal on boull.
Pa 'h e' berr ar vuhez ni, paotred dizoursi,
A hargaso dim trubuil ha melkoni.
Eur c'hoant hepken on-eus : klask bemdez plijadur !
Eur vag ne blij ket dim mar ne vez ket distur.
Dem oll da vale kêr, da dañsal, da evañ,
Ha gwaz a ze d'an neb 'blijo ket se dezañ !... »

Ar vouez a davas mik,, hag eur c'hoarz-yud, raktal,
A lakaas ar vro, tro-war-dro, da sklokal,
Ma oa eur spont kleved ar voubou er hoajou.
Mez, a-greiz-oll, eur vouez a zavas er mêziou,
Eur vouez ken dudiuz evel mouez an êle',
Pa ganont en Neñvou meulodiou Doue.

« Hirie, o ! ma Jezuz, dirag ho Kalon Zakr,
D'ar bed, d'e skweriou fall ha d'e hiziou fallagr,
E lerom kenavo, kenavo da viken,
Hag e touom bevañ evel gwir gristenien.
Pa 'peus evidom oll gouzañvet poaniou braz,
An naon hag ar sched, ar maro war ar groaz ;
Pa zo plijet ganeoh reiñ dim 'n on dienez
Ho korv, ho kwad santel evid magadurez,
Ha chom ganim beteg on devez diwezañ,
Ni 'deu gand levenez deoh-c'hwi da 'n em ouestlañ.
C'hwi 'zo 'n em roet dim, ha ni a 'n em ro deh¹⁸,
Hag hen lerfom heb mez, d'an oll hag en peb leh.
E-barz on parroziou gwechall ar feiz 'oa kreñv,
An dud oll, war eun dro, 'gerze war hent an Neñv.

¹⁸ deh : deoh.

Overn ha gousperou 'veze darempredet ;
Pardoniu on zent koz gand feiz 'veze heuliet :
'Barz an tiegeziou e oa peuh hag urz vad ;
Ar bugel a douje hag e vamm hag e dad ;
Laouen-braz, ouz e vestr ar mevel a zente ;
Ar paour hag ar pinvig 'vel breudeur 'n em gare ;
Ha mar labourent stard, da vihannañ an dud
A veve evuruz, pell dimeuz an tabut.
O ! nag eh e', siwaz ! troet ar blanedenn :
Dilezet e' Doue, dilezet ar bedenn ;
E-pad an overenn, e-pad ar gousperou,
An iliz aliez a vez hanter-houllou ;
Ar skwer fall er hêriou, war ra mêz, en pep stumm,
A ziroll en-dro dim 'vel eur mor a vunum...
Ahanta, ma Jezuz, ni ro deoh on halon
'Vid ho tigoll eun tamm, ni a houlenn pardon.
Roet ar sklêrijenn d'ar speredou dallet ;
Mouget er halonou devet gand ar pehed,
Tangwall an techou fall, ha ma savo peb mouez
Da zivenn ar wir feiz dirag an oll, heb mez ;
Ma sento ar bed oll ouz ho kourhemennou¹⁹,
Meulet da vo Jezuz, Jezu on gwir Aotrou !...

Dre ma save ar vouez, e lein ar baradoz,
Jezuz, diwar e dron, a skuille e vennoz
War an eil rummad tud ken leun a garantez,
Hag ouz ar rumm kentañ e selle gand truez.

Ar zul 11 a viz Even 1890.

¹⁹ Ma sento ar bed oll ouz ho kourhemennou : **notenn gand Embann an Hirwaz** : Felloud a ree d'ar veleien beza mistri war an dud.

KROAZ ar STURIER

Koajou savet el lanneier,
En lez ar mor, er parkeier,
War lein uhel ar menezioù
Hag en donder an traoniennou,

Pa dremenan en ho kichenn,
Deuz ma halon 'strink eur bedenn,
Eur bedenn 'vid on zadou-koz
'Zo er bed all ouz on gortoz.

I, en o feiz stard evel roh,
E' o-deus savet ahanoh,
Da zegas soñj d'an tremener
Dimeuz karantez e Zalver.

Me 'oar, damdostig d'ar mor braz,
E-kreiz eul lann meinek ha noaz,
Eur groaz krignet gand an amzer,
Hag heh ano "Kroaz ar Sturier"

Martoloded kristen ar vro,
'Raog mond kuit, ha pa vent distro,
D'he zroad 'deu da bedi gand fe',
Evdi goulenn skoazell Doue.

E-pad o beaj aliez,
Paz vez trubuil en tiegez
O kleved ar mor o krozal
Hag an avel foll o yudal,

O gwreg, he bugale ganti,
A deu eno c'hoaz da bedi,
Da houlenn sikour 'vid ar re
'Zo en riskl da goll marteze...

Eun abardaez e tremenis
E-tal ar groaz, hag e welis
Eur plahig stouet d'an douar,
Hag hi mantret gand ar glahar.

Hirvoudi a ree truezuz,
Leuskel 'ree klemmou ankeniuz,
Ha beb an amzer e lere :
« Ma Doue, bet truez oute ! »

Eun tammig pelloh peder all
Ne zoñjent nemed ebatal
Ha taol en êr, en eur hoarzin,

O hanaouen zart ha sklinterin.

« Petra 'zo kirieg, ma flahig,
D'ar boan a rann da galonig ?
Perag da daerou 'red ken puill ?
Perag 'teus kement a drubuill ?

« Pa 'mañ da gamaradezed
Er joa hag en evurusted,
Perag out-te amañ, lar din,
O ouelañ hag o hirvoudiñ ?... »

Hag ar plahig a respontas
'N eru zevel he daoulagad glaz :
« Ma zad ha ma daou vreur henañ
'Zo eet d'an Izland, er bloaz-mañ.

Setu bremaig daou viz 'zo
Ne zo ket bet deuz o helo' :
Biskoaz ken pell ne oant chomet
Heb bezañ bet d'ar gêr skrivet.

Du-hont, en chapel ar Werhez,
E pedan 'vite aliez.
Daoulinet dirag he skeudenn :
'Zeblant ket kleved ma fedenn.

Ma mamm baour klañv en he gwele
Ne ra 'med gouelañ entr' an de'.
Gweled a ret 'ta, aotrou mad,
Eh e' gwall-ankeniuiz ma stad !... »

« Laka da fiziañs en Doue ;
Ped anezañ bepred gand fe',
Ha deuz lein an Neñv e skuillo
E vennoz war da drubuillo' . »

Hag ar plahig, ouz troad ar groaz,
A bedas eru pennadig c'hoaz,
Ha goude, muioh kaloneg,
D'ar gêr 'tistroas 'n eur redeg.

Ar bedenn vad 'zo gallouduz,
Hag er bed-mañ ken trubuilluz,
E ra dim kad dimeuz an Neñv
Nerz da houzañv poan ar vuhe'²⁰.

²⁰ E ra dim kad dimeuz an Neñv
Nerz da houzañv poan ar vuhe' : **Notenn gand Embann an Hirwaz** : ha gwir e oa ?

3 a viz Gouere 1899.

DISTRO AR MOUSIG BIHAN

« Pan !... Pan !... Mammig, hastet sevel,
Arri e' ar mous, ho pugel :
Savet buan deuz ho kwele,
Bremaig e tarzo an de'.

« E-keit ha ma oah o kousked,
Ar mous bihan 'n-eus douaret :
Deut eo gantañ e daol da vad,
Roet eo dezañ e vennad.

Hast en-deus d'ho kweled bremañ,
'Vid ma rofet eur pok dezañ :
Tridal a ar e galonig
War dreuzou toull-dor e vammig... »

« Deus 'ta, kêzig, war ma halon !
Na pebez dihun evidon.
Ouz da weled yah ha joaüz !
Biskoaz n'on bet ken evuruz.

'Baoe an deiz ma oas eet e-kuit
'M-eus bet kalz a drubuill ganit,
Hag er mor 'zo kerreg treitour
Ha gwagennou dibalamour.

Lar din bremañ, lar din gwirion :
Pa oas o treuzañ ar mor don,
Ha pa oas du-hont, en Izland,
N'az-teus ket bet a nehamant ? »

« Geo 'ta, ma mammig, aliez
Em-eus santet an dienez
Dimeuz ho kalon ken tener
Hag ho karantez diniver.

Nag a wech, pa veze noz,
Souchet e-barz ma gwele kloz,
Em-eus glebiet ma liñseliou,
Ken doureg 'rede ma daerou.

Labour ar mousig 'veze stard,
Diêz 'oa dezañ bezañ sart :
Koulskoude, o soñjal 'n e vamm
E veze kennerzet eun tamm.

Pa lere ennañ e-unan :
Da vamm ganit he-deus bet poan ;
D'az tro, labour ivez bremañ

Da zikour anezi da vevañ.

Hag o soñjal en kement-se,
E teue din eun nerz neve' :
Piou ne labourfe kaloneg
Evid eur vamm ken karanteg ?

Er goañv kaled, ar hlasker kêz ;
'N ho kichenn 'ankouain ivez
Poaniou an daerou em-eus skuillet... »

« Me 'garfe n'afes ket du-hont :
Pa vez²¹ war vor me am-bez spont
O soñjal er herreg treitour
A zo kuzet dindan an dour. »

« Koulz ha war vor, war an douar
E zo²² ivez poan ha glahar :
Er gwellañ kig e zo eskern,
Ha dindan ar roz e zo spern.

Seul-vui 'vez kaled ar goañv,
Seul-vui 'prizer tommder an hañv ;
Ha, pa vez bet al labour tenn,
E vez dousoh ar gouskadenn.

Na vet ket nehet, mamig ker,
Ho kalon baour 'zo re dener :
Setu e-pad c'hweh miz arre
E vin 'n ho kichenn noz ha de'.

'Daleg arhoaz, pa vin diskuiz,
Eh efom on-daou d'an iliz
Evid trugarekaad Doue
Hag ar Werhez santel ive'.

Hi 'deus diwallet ho pugel
Deuz ar herreg, deuz an avel,
Ha deuz oll risklou ar mor braz :
Hi 'diwallo anezañ c'hoaz. »

2, miz Eost 1890.

²¹ vez : vezez.

²² E zo : ez eus.

O SOÑJAL EN NEÑVOU

Nag e ve flour son an delenn,
Pa dreuz al lanneier melen
Douget war askell an êzenn !

Flourroh eo c'hoaz mouez en Êle'
O kanañ oll : Gloar da Zoue !

Nag eo dudiuz, er hoajou,
Kleved mouez ar labousedigou
Pa gouez an noz war ar mêziou.

Dudiusoh e vo, en Neñv,
Kleved meulodiou Doue.

Nag eh eo dous 'vid ar galon
'N em harpañ war eur gwir vignon
'Barz ar bed-mañ ken diwirion !

Dousoh 'vo c'hoaz, e-barz an Neñv
'N em harpañ war galon Doue.

Nag e tered on foaniou pell
Pa glevom mouezig an avel
O hiboudal er gwez uhel !

Pelloh 'teho ar poaniou-ze
Pa vefom eet oll gand Doue.

Nag eo talvouduz d'ar paourig,
Hanter-varo 'n e lochennig,
Skoazell ha sikour ar pinvig !

Talvoudusoh eo d'an ene
Skoazell ha sikour e Zoue.

Nag eo evuruz eun tiad,
Ha bugale ha mamm ha tad,
'Pa vez entreze buhez vad !

Evurusoh e vo en Neñv
Ar zent unanet gand Doue.

Nag e ra vad d'ar beajour
Distana 'n eur bannahig dour
E dreid tanaillet ha loudour !

Muioh a vad 'ra d'an ene
Bezañ gwalhet gand gras Doue.

En miz Eost 1899.

AN DERO TRIST

Dero a zav war ar hleuniou,
En-dro da barkou Breiz-Izel,
En korniou teñval ar hoajou
Ha war ar menezioù uhel.

Perag oh-hu ken treud, ken moan,
Ken reuzeudig ha ken brevet,
Ma treuz on halon gand ar boan ;
Gand an druez ouz ho kweled ?

Pa deu an avel da hwezañ,
Perag, a-dreuz d'ho prankou striz,
E klevom eur vouez o ouelañ,
Eur vouez o ouelañ ken iskiz ?

« Selaou ! eme eur vouez klemmuz
O sevel deuz kalon ar gwe',
Selaou ahanom aketuz,
Hag e kontfom dit on doare.

Gwechall, an tadou, ar mammou,
O bugale vihan gante,
D'ar zul, goude ar gousperou,
E skeud an derv a ziskuize.

Neuze, e klevem ar re goz,
Tudou leun a skiant-prenañ,
O tivizañ beteg an noz
Hep kammed noazoud d'o nesañ.

Hag e komzent deuz o labour,
Dimeuz o zaout, deuz o hezeg,
Deuz ar sehor, deuz ar glebor²³,
Heb ma vije tamm brohadeg.

A-wechou ivez, 'n o diviz,
E reent kaoz deuz ar veleien,
Deuz Doue ha deuz an Iliz,
Gand eun doujañs bepred kristen.

Hag e-keit-se, ar vugale,
Ar re aneze 'helle kerzed,
Oll, an eil war-lerh egile,
A rede gand evurusted.

En hañv pa veze pardonioù,
E welem an dud 'n eur bagad,

²³ glebor : glebour er skrid orin.

O heuill ar prosisionou
En eur bedi a galon vad.

Pa veze achu an ofis,
Servijet ganet o Hrouer,
E vatee ar yaouankiz
E skeud an dero, dibreder.

O haozeadenn 'veze flour
Ha leun a garantez wirion,
Didamall-krenn ha didreitour,
Rag divlamm-oll 'oa o halon.

Hag e tro mare ar huz-heol,
Paotred ha merhed war eun dro,
Prim d'ar gêr e tistroe oll,
Glan o halon hag o geno'.

Pa veze amzer ar festou,
E welem eureujou a-bez
Renet gand son ar biniou,
O tañsal hep tamm gadelez.

Ar mesaer, da houlou de',
'N eur vond da vesa e zeñved,
A ree tregerni ar mene'
Gand soniou koz ar Vretoned.

Neuze, avad, 'oa brao bevañ,
Ha mouez an avel o tremen
A gane flour, e-leh gouelañ,
En deliou ledan an dervenn.

Neuze, korv an dero 'oa teñv,
Hag e savent sonn-mad o fenn,
Heb aon ebed, war-zu an Neñv,
Hag o brankou 'ree eur volzenn.

Bremañ ar rod a zo troet ;
Eet eo ar bed war an tu-gin :
Ar gizioù koz a zo kollet :
N'eus ken a Vretoned lirin.

Hirie, peleh 'vez tad ha mamm ?
Peleh e vez ar vugale ?
Me 'gred na zo ken den divlamm,
N'eus ken neb leh a garante'.

E-leh dond e skeud an dero,
Evel gwechall da ziskuizañ,

Eh eer d'an ostaleriou,
D'evañ ha da bolitikañ.

En korv, en brankou an dervenn,
'Zo bet lakaet gand Doue
Evel eun ene da gompren
Ar bed, an den hag ar vuhe'.

En ene-ze e sav trubuil,
Evel e-barz ene an dud :
Setu perag e ouelom puill
Hag e chom on horvou munud.

*

... Eur barr-avel a dremenas,
Hag an dero a davas mik :
Me 'gred 'oa o glahar ken braz
Ma oa rannet o halonig.

En Miz Eost 1899.

BEVET BREIZ-IZEL

(Ar werz-mañ ken kaer on-eus kavet war eun tamm paper distag, hag hi diachu ha dizano ! Da 'vo dim-ni evel testamant hag aliou diwezañ an Tremener).

Ha soñj az-teus ?... Eun devez d'abardae'
E oam on-daou 'n eur harrdenn o vale
E keud ar gwe'.

A-dreuz da volz skleuzet war ar brankou,
E welem o redeg ar goabrennou,
Dre an oablou.

'Mesk an deliou, al laboused laouen
A vouskane flour-flour o hanaouenn
A-uz d'on fenn.

Damdost, ar mor goloet a listri
A groze kreñv 'n eur ruillal ar bili,
'N eru eonni.

Hag e reem kaoz dimeuz an amzeriou
Ma klevet c'hoaz en kêr hag er mêziou
Son ar biniou :

Ma oa Breiziz tud feal ha penneg,
Ma komzent oll, hag heb bezañ mezeg,
Ar brezoneg.

Ha soñj az-teus ?... An noz a ziskennas,
Eur vantell zu war ar bed en em ledas,
Hag hen kuzas.

*

Ha ni d'an ti ; goude eun devez poan,
Ar vederien, en-dro d'an daol ledan,
'Oa gand o hoan.

Goude ar pred, ar mestr, eur gwir Vreton,
Lemm e spered hag e gomzou gwirion,
'Ganas eur zon.

Ha ni on-daou, ouz an daol azezet,
On zell warnañ, a vanas souezet
Ouz e gleved.

En dour ar ster e weler an Neñvou,
Ar yeot, ar gwez, hag an oll vokejou
A vez war-dro ;

Ha gand ar zon, dirag on daoulagad,
Breiz-Izel goz 'dispake deread
He giziou mad.

Breiziz gwechall, gwir vugale Doue,
Hervez ar zon, 'oa hañval ouz Êle'
Dimeuz an Neñv.

Hag e weled, en kalon pep hini,
Evel an heol, karantez, feiz ha spi,
O lugerni.

Draempredi a reent ar pardonioù,
D'an oll zent koz e kanent pedennou
Ha kantikou.

*

On sperejou 'nije dreist d'an Amzer,
Da heuill ar zon, evel an alhweder
A-dreuz d'an êr.

Achu ar han, 'oa displeget a-bez
Istoar on Breiz, he hustumou, he yez,
Ha sklêr ha frêz.

Hag on halon a dride en on hreiz,
O kleved kan ha meulodi e-leiz
En enor Breiz.

Bevañ rejom eun eurvez evuruz,
Hag huñvreal eun huñvre dudiuz,
Meurbed joañz !

Pa vent tommet gand an nevez-amzer,
An trevajou a zav o fenn en êr,
Mistr ha seder ;

'Vel-se ivez, ar haner on tomme,
Hag en on hreiz, tamm-ha-tamm e save
Eun nerz neve'.

*

Hag e toujom divenn 'pad on buhe'
Gand on halon, on spered, on ene,
Breiz hag he fe'.

Ma c'hoariet ar homediantchou,
Ma kasaet an ostaleroù
'Daon an tudou.

Ma vo gizioù ouz ar re goz hañvel,
Ha ma vo c'hoaz savet on Breiz-Izel
Uhel-uhel !

26 a viz Gwengolo 1890.

DA ZERR-NOZ

An heol a zo kuzet a-dreñv d'ar menezioù ;
En dremmwel, eur hlerh ruz a vevenn an Neñvou :
Eur zioulder dispar war ar mêzioù a goue',
Hag eur peuh dianav a diskenn en ene.

Neuze, me a blij din 'n em hoazez war ar run,
Lenn, skrivañ, pe ober eur hornedad butun,
Kanañ, soñjal, selled a bep tu en-dro din,
Pe diskenn em halon eun tammig da bediñ.

Du-hont, war lez ar mor, emañ kêrig Pempoull,
Koant ha sard 'vel eun neiz en he zraonienn sioul.
Kêriz, e-pad an deiz, o-deus labouret tenn,
Rag deuz an dienez e rankont 'n em zivenn.

Bremañ, kalz dioute a zo war dreuz o dor
O kemer an êr fresk a zav dimeuz ar mor.
Ar re goz, o weled an amholo o tond,
A zoñj er bez teñval e-leh ma tiskennfont.

Ar vicherourien dreud, debret ganet o hoan,
A gaoze deuz an deiz tremenet hag e boan :
Hag ar varhizien lard a gomz uhel da vad
Diwar-benn an doare da wellaad o stad.

Ar priedou, harpet an eil war egile,
A zell o bugale o c »hoari war ar hae,
Ha, kazell ouz kazell, an dud yaouank seder
A vale war an aot diskuiz ha dibreder.

Goude eh e' diskarget an trêz hag ar bezin,
Ar gobiri, renet gand paotred a ijin,
Koant ha mistr da weled gand o gouelioù gwenn-tre,
A zistro prim d'ar gêr adaleg ma zo tre.

El lann, ar mesaer a dastum e zeñved,
'N eru strakal e skourjez 'vid reizañ o herzed ;
E spered 'zo dineh hag e galon laouen,
Ha, pa dro en e benn, e richan eur bedenn.

« Doue, krouer an Neñv, ar mor hag an douar,
Warnom-ni divroet er bed-mañ a hlahar,
Leun a zempladurez ha ken techet d'ar fall,
Gret eur zell a druez, deredet d'on diwall... »

Eur vogedenn a zav dezu ar chiminaliou,
Hag eur vrumenn a gouez dimeuz bolz an Neñvou,
Hañval ouz eur vantell teñv ha ledan-meurbed,

Displeget gand Doue evid kuzañ ar bed²⁴.

Mouezig flour an avel a voud ‘mesl an deliou,
Richan al laboused a strink ‘touez ar brankou ;
Ar mor ‘zeblant kanañ ‘n eur lipad ar bili,
Ar hloh a zon en tour.. O ! na pebez dudi !

Gwall-fall e’ neb a glev hag a wel kement-se
Hep sevel e galon war-zu ‘n aotrou Doue.
An dud a ijin braz ‘vez meulet er bed-ma’ :
Dleed a reer ivez meuli Krouer pep tra.

1899.

²⁴ Displeget gand Doue evid kuzañ ar bed : **notenn gand Embann an Hirwaz** :neuze e oa fall ar bed bet krouet gand Doue, pa vez red dezañ kuzañ anezañ.